

# Fiñv da Skolaj

Skolaj Diwan Jakez Riou / n°10 / Miz Kerzu 2019

## BEVAÑ E BREZHONEG VIVRE EN BRETON

**SAVADEG VRAS EVIT MA CHOMO BEV HOR YEZHOU !** Gwall skoet eo an hentenoù divyezhek e yezhoù rannvro gant adreizhadur ar c'helenn el lise hag ar vache-louriezh. Digresket eo spontus an niver a liseidi o heuliañ kentelioù yezhoù rannvro e kement lise zo abalamour d'ar c'hoefsiant dister roet d'an danvezioù-se evit ar bacho hag abalamour m'eo rediet al liseidi da choaz etre ar yezhoù-se ha danvezioù all (ha n'eo ket da studiañ ouzhpenn). 600 den oa bet bodet e Pariz d'an 30 a viz Du evit goulenn gant ar ministr Blanquer reizhañ an traoù. Ur sinadeg zo bet lakaet en linenn. Mar plij sinañ anezhi ma n'eo ket graet c'hoazh.

<http://chnng.it/K7HnSfXr>

**MOBILISATION GÉNÉRALE POUR QUE VIVENT NOS LANGUES !** La réforme des enseignements en lycée et de l'organisation du baccalauréat a des conséquences terribles pour toutes les filières de langues régionales. Du fait des faibles coefficients et de la mise en concurrence de nos langues avec les autres matières, on constate partout une chute dramatique des effectifs d'élèves inscrits en langues régionales en lycée. Une manifestation a rassemblé 600 personnes à Paris le 30 novembre. Une pétition est en ligne pour interpeller le ministre Blanquer. Merci de la signer si ce n'est déjà fait.


## KELEIER AR C'HUZUL-MERAÑ / LES NEWS DU KUZUL-MERAÑ

**PETRA NEVEZ ER C'HANTIN ?** Profitet en deus ar skolaj eus ur yalc'had roet gant Kuzul Departamant Penn-ar-Bed evit staliañ un daol dispartiañ al lastez er c'hantin. Ar restachoù mat da roteliñ a vo daspugnet ha lakaet en ur rotel e-kichen al liorz. Ur c'hud a vo savet hag ul lodenn eus lastez ar c'hantin az aio da vouetañ un nebeud yer. Dileurid glas zo bet choazet gant pep klasad. Lakaet e vint er jeu evit kas ar boued er rotel, ober war e zro, bouetañ ar yer ha dastum ar vioù. Teir foubelenn da zibab lastez zo bet staliet dindan er bratell ivez. Da notenniñ ivez : ur pred vejetarian a vo bep Meurzh er c'hantin, hervez al Lezenn war ar boued votet e fin 2018.



**QUOI DE NEUF À LA CANTINE ?** Le collège a profité d'une subvention du Conseil Départemental du Finistère pour installer à la cantine une table de tri des déchets. Les restes compostables seront récupérés et mis dans un composteur à côté du jardin. Un poulailler sera construit et une partie des déchets de la cantine nourrira quelques poules. Des délégués «glas» (vert) ont été choisis par chaque classe. Les collégiens s'occuperont du compost, des poules et du ramassage des œufs. Trois poubelles de tri ont également été installées sous le préau. A noter également : un repas végétarien sera servi tous les mardis à la cantine, conformément à la loi sur l'alimentation votée fin 2018.

**AR C'HOUSKVA E BORD AR MOR E ENEZ-TUDY** Goude an diloadeg e miz Even gant skoazell kerent ar skolaj e oa prest ar c'houkva nevez da zegemer 31 plac'h ha 29 faotr evit an distro skol. Al lec'h a blij d'ar skolidi memes ma chom traoù da renkañ evit ma vefe mat kaer. Labourioù a vo graet evit ma vefe ul lec'h a feson : cheñch prinistri e miz C'hwevrer (gwerennadur doubl), livañ kambrier ha kempenn privezioù ha strinkerezhioù ar baotred (a benn bloaz). Ur c'hontrat feurmiñ zo bet sinet etre pec'henn al lec'h, ar gevredigezh Berry-Tudy (hag a aoz kampoù vakañsoù), hag ar skolaj.



**L'INTERNAT DU BORD DE MER À L'ÎLE-TUDY** Après le déménagement du mois de juin par des parents du collège, le nouvel internat était prêt à la rentrée pour accueillir 31 filles et 29 garçons. Le site plaît aux élèves, même s'il reste encore des choses à faire pour que ce soit super. Des travaux vont être faits afin d'améliorer les lieux comme le remplacement des fenêtres en février (double vitrage), la peinture dans les chambres et la rénovation des toilettes et douches des garçons dans un an. Un contrat de location a été signé entre le propriétaire du lieu, l'association Berry-Tudy (qui organise des séjours de vacances), et le collège.

## SKOLAJ MOD IMPLIJ COLLÈGE MODE D'EMPLOI

**1 SKOLAJ, 2 GEVREDIGEZH** Div gevredigezh, kaset gant tud skolajidi, a labour bemdez evit reiñ kondisionoù skoliata brav d'hor bugale :

☞ ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ, un 10 den bennak ennañ, CA e anv boaz. Merañ a ra al lojeiz, an darempredoù gant ar gevellerien, ar c'hoprìdi, an hunva, ar c'hantin, an dafar... Olivier Méreaux eo ar prezidant anezhi, Cécile Fédieux ar sekretourez ha Cécile Partant an teñzorourez.

☞ ar gevredigezh « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ ivez, met digor d'an holl eo emvodoù ar c'huzul-skoazell. Dastum arc'hant evit arc'hantañ ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou » eo he fal. Florence Viol hag Aurélie Savina zo kenbrezidantezed, Lenaig Abiven ha Gildas Bitout sekretourien ha Cécile Coue teñzorourez.

À retenir : Kuzul-skoazell veut dire comité de soutien, et CA se dit kuzul-merañ en breton.

**1 COLLÈGE, 2 ASSOCIATIONS** Deux associations, composées de parents de collégiens, œuvrent au quotidien pour que la scolarité au collège Diwan Jakez Riou se passe dans les meilleures conditions matérielles possibles :

☞ l'association « Skolaj Diwan Jakez Riou » : dirigée par un conseil d'administration d'une dizaine de membres (appelé couramment CA), elle gère les locaux, les relations avec les partenaires, les salariés, l'internat et la cantine, le matériel... Olivier Méreaux en est le président, Cécile Fédieux la secrétaire et Cécile Partant la trésorière.

☞ l'association « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou » : également dirigée par un CA, mais de fait, toutes les réunions sont ouvertes à tous. Elle a comme mission de récolter des fonds pour aider au financement de l'association « Skolaj Diwan Jakez Riou ». Florence Viol hag Aurélie Savina sont co-présidentes, Lenaig Abiven et Gildas Bitout secrétaires et Cécile Coue la trésorière.

# BUHEZ AR SKOLAJ VIE DU COLLÈGE

**REKİPE** Ar skolidi 6<sup>vet</sup> a brof deomp daou rekiye li-pous evit an Nedeleg : bara mel an Nedeleg ha saosison chokolad. Trugarez dezho !

## BARA MEL AN NEDELEG

Dafar ret : ur volenn vras, ul loa vihan, ul loa vras, un traper, ur werenn dereziet.

Aozennoù : 4 gwerennad bleud, 2 loaïad vihan kanell, 1 pakad goell, 3 loaïad vras mel, 3 loaïad vras spisoù, 2 vi, 4 loaïad vras chokolad, 2 werennad sukr, 2 werennad laezh, 1 werennad dienn.

Penaos ober ?

- 1) Meskit ar vioù hag ar sukr er volenn vras ;
- 2) Lakait ar goell, ar spisoù, ar mel, ar c'hanell, ar chokolad, al laezh hag an dienn ha meskit tout ;
- 3) Goude-se lakait ar bleud goustadik, ret eo d'an toaz bezañ lintr ;
- 4) Amanennit ar moull ;
- 5) Skuilhit an toaz e-barzh ar moull ;
- 6) Lakait da boazhañ er forn e-pad 30 munutenn (200°).

**RECETTE** Les élèves de 6<sup>e</sup> nous offrent deux recettes de dessert gourmand : du pain d'épices de Noël et du saucisson au chocolat. Merci à eux !

## SAOSISON CHOKOLAD

(evit 12 den)

Dafar ret : ur volenn vras, ul loa koad, ur gastelodenn, paper alu evit mirout er yenez.

Aozennoù : 400g chokolad, 200g amann,

2 vi, 300g gwispid LU, 100g sukr, poultr koko evit kinklañ.

Penaos ober ?

- 1) Lakait ar chokolad hag an amann da deuziñ, lezit da yenaat ;
- 2) Meskit ar vioù, ar chokolad, hag ar gwispid bruznet (pas re vihan) ;
- 3) Enrollit er paper alu e stumm ur saosison ha lakait er yenez betek ma vo kalet.
- 4) Debrit mat !



**DEIZIADURIOÙ** Kalzig a deiziadurioù Diwan 2020 a zo da werzhañ. An tem : troioù-lavar saourus, skeudennet gant Krank Du. Goulennit ho lod digant Soazig, er sekre-tourva. 10€ an tamm.

**CALENDRIERS** Il reste pas mal de calendriers Diwan 2020 en stock. Le thème pour cette année : 12 expressions en breton illustrées par Krank Du. Demandez à Soazig, au secrétariat. 10€ le calendrier.

## DEIZIATAER AGENDA

**31/12/2019** Fest-noz Kalanna kenaozet gant Diwan Kemper

**21-24/01/20** Staj micher an Tredeidi

**08/02/2020** Dorioù digor er skolaj

**10/02/2020** Kroashent ar micherioù e Karaez

**31/12/2019** Fest-noz Kalanna co-organisé par Diwan Kemper

**20-24/01/20** Stage en milieu professionnel des 3<sup>e</sup>

**08/02/2020** Portes ouvertes au collège

**10/02/2020** Carrefour des métiers à Carhaix

# BERR HA BERR

## BERR-HA-BERR BRÈVES

**GWEZ SEPREZ** Siprez a oa war vord ar porzh. Diskaret int bet gant servijoù-kêr peogwir e oant klañv. Un tamm goulo a seblant ar porzh bremañ. Evit adkrouiñ un aergelc'h «glas» ha peadra da herberc'hiañ al lapoused, ur strollad skolidi youlek a gemero perzh evit plantañ gwez nevez e-kerzh miz Kerzu.

**OALD AR SKOLAJ** Livioù nevez a zo gant oaled ar skolaj. Staliet zo bet eno gourvezvankoù soupik (trugarez da Guzul Departamant 29 evit ar sikour arc'hant).

**FIBR OPTEK** vo e miz Kerzu 'vo staliet ar fibr optek er skolaj. Bet prometet deomp dibaoe pell zo met, ar wech-mañ, sur eo !

**BASKET E BREZHONEG** Menet eo c'hoarierien basket an UJAP gant ar brezhoneg ! Pedet o deus pevareidi da zont da c'hoari ganto ha dont a raint er skolaj evit heuliañ kentelioù brezhoneg gant ar skolajidi !


**RAKTRES ARZOÙ** Kroget 'vo dizale daou raktres arzoù. Savet 'vo filmoù chakod gant ar re 6<sup>ved</sup>, sikouret 'vint gant Daoulagad Breizh. Prientet 'vo ur pezh-c'hoari gant ar re 4<sup>re</sup>, skoazellet gant La Obra. Kinniget e vo e fin ar bloaz.

**BLOG AR SKOLAJ** Ingal e vez embannet pennadoù war blog ar skolaj diwar-benn ar raktresoù kaset gant ar skolajidi. Gallout a rit koumanantiñ d'ar blog ha resev ar pennadoù nevez embannet e-barzh ho poest-posteloù. <http://skolaj-diwan-kemper.over-blog.com/>

Nedeleg laouen d'an holl. Bloavezh mat, yec'hed, bara er forn ha karantez leiz an dorn !

**CYPRÈS MALADES** Les cyprès malades situés au bord de la cour ont été abattus par les services municipaux. La cours semble un peu vide à présent. Pour recréer une ambiance de verdure et héberger les oiseaux, un groupe d'élèves volontaires participera au reboisement au cours du mois de décembre.

**LE FOYER DU COLLÈGE** Le foyer du collège a pris des couleurs, avec de nouveaux canapés soupik ! (merci au conseil départemental de Finistère pour son aide financière).



**FIBRE OPTIQUE** La fibre optique arrivera enfin au collège courant décembre. On nous l'avait maintes fois promise, mais cette fois, c'est sûr !

**BASKET EN BRETON** Les basketteurs de l'UJAP aiment le breton ! Ils ont invité des élèves de 4<sup>èmes</sup> à jouer avec eux et viendront au collège prendre des cours de breton avec les collégiens !

**PROJETS ARTISTIQUES** Deux nouveaux projets artistiques débiteront prochainement : les élèves de 6<sup>ème</sup> se lanceront dans l'aventure des « filmoù chakod », aidés par des professionnels de Daoulagad Breizh. Les 4<sup>èmes</sup> prépareront une pièce de théâtre avec la troupe La Obra, la pièce sera présentée en fin d'année.

**LE BLOG DU COLLÈGE** Des articles sur la vie du collège et les projets des collégiens sont publiés régulièrement sur le blog du collège. Vous pouvez vous abonner et recevoir les dernières publications dans votre boîte mail. Les articles sont en breton, l'occasion de pratiquer et d'échanger avec vos enfants. <http://skolaj-diwan-kemper.over-blog.com/>

Bon Noël à tous. Bonne année, santé, du pain au four et de l'amour plein les mains !